

# FISTOULIK<sup>(\*)</sup>

## KANAOUEN NEVE

*Great gant eur C'herncrot ha kiniget gant-han da gement Fistoul,  
Fistoulez, Fistouler, Fistoulérez, Fistoulik, Fistoulikez a zo  
e Breiz, mar deuz, siouaz, enn-hi ouspen unan!...*

*War don : Ann hini gouz co ma dous.*

*Castigat ridendo...*

Pôtret a Vreiz, deut da gleyet  
Eur ganaouen neye zo gret

Da Fistoulik tra la, la,  
Da Fistoulik tra la.

E parrez Tansoultr e ganet,  
Gant eur plac'h oa ket eureujet

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

Eur gomer 'laraz gouz tadik :  
Hema vo zur eur fistoulik.

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

Ha setu deut ann tol da vad,  
Fistoulik zo 'r paotr dilikad.

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

Lavaromp ar wirione c'huek :  
Fistoulik zo eur c'hefek,

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

Fistoulik zo eunn den dispar  
Neuz ket'vel-d'han war ann douar,

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

(\*) *Fis-tout*, diminutif *Fistoulik*, fureteur, celui qui cherche partout comme un furet, qui fouille, qui brouille, qui remue tout, (Voyez le dictionnaire breton-français de Le Gonidec-Lavillemarqué, pages 316 et 317).

Er Ponthou reaz he retorik  
Gant eur bris-diott Louidik ,

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

Fistoulik , ahu he studi ,  
Lakaz lunedou war he fri.

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

Bloukou arc'hant war he voutou ,  
Setu Fistoulik eunn aoutrou ! ...

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

A geste , tud paour , reuzeudik ,  
Plaç , plaç d'ann aotrou Fistoulik !

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

Ann dud huel ha pinvidik  
A zo brema tud Fistoulik.

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

Malloz d'ann bini n'ed eo ket  
War gaier Fistoulik douget.

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

Fistoulik'lar bea kamarad  
Dar Roue hag ive d'ar Pab.

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

Allaz , mor teufent da gouenza ,  
Gant-han do'r ruaden genta ! ...

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

Fistoulik lar eo eur PIPI  
Hag ann dud all moc'h ha bleizi ,

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

Fistoulik a ro da gredi  
E kas ann dud dre beg ho fri.

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

Mar d'oc'h euroz ha puissant ,  
Fistoulik'rai ar c'hi kouchant.

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

Bezit kanfart , mes pinvidik ,  
Hag o po istim Fistoulik.

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

Bezit den brao 'vel sant Iouen  
Fistoulik skoñ war ho chupen .

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

Fistoulik 'lavar eo kornek  
Kement hini n'her salud ket.

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

Fistoulik'wel kerniel'r re-al ,  
Ne wel ket re zo war he dal.

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

Anaout a ra dre ho hano  
Kement risklerez zo er vro ,

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

Dre c'hinou Fistoulik biskoaz  
Ar wirione ne barlautaz.

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

Kaout'ra da laret penn da benn  
Er seurezet, er veleien.

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

Dua a ra gant falz komzo,  
Ann dud varo enn ho beio.

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

Ann dud fur, ann dud santella  
Ve labeet gant-han ar goasa.

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

Gant petra ve labeet ann den  
Nemet gant pri ha gant bouillen?...

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

Evit kaout ar groaz, Fistoulik  
N'euz gret mil ha mil chiboudik.

Fistoulik tra, la, la, la,  
Fistoulik tra, la, la.

Mes er vro ma kroaz annenor  
Ve ket laket war fri Medor.

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

Fistoulik a zo eur breser  
Gant ann holl e rank kaout affer.

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

Fistoulik a zo eur marmouz,  
N'eo mad nemet da ober trouz.

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

Fistoulik evel eur pabor,  
Hep digare skoi war ho tor.

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

Kasit Fistoulik meaz ho ti,  
Dre ar prenest vouto he fri,

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

Enn kement parrès pa guita,  
Wer he lerc'h ve eun tan a joa.

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

Fistoulik zo eur Iann brema,  
Ankoet he vrezonek gant-han,

Fistoulik tra, la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

Brezonek flour he vro koant Breiz,  
Mes komz a ra gallek iskiz.

Fistoulik tra, la, la, la,  
Fistoulik tra, la, la.

Kred ac'hanon, kalz eo gweloc'h,  
Brezonek tud 'vit gallek moch.

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulis tra la, la, la.

Fistoulik zo eat da azen,  
Ann ourgouil n'euz troet he benn.

Fistoulik tra la, la, la,  
Fistoulik tra la, la.

Gouskoude 'teuaz ann ankon  
Da gas Fistoulik ebn he dro.

Fistoulik tra, la, la, la,  
Fistoulik tra, la, la.

Gant'n ourgouil 'kreuvaz Fistoulik,  
Setu hen bréma maro... mik.

Fistoulik tra, la, la, la,  
Fistoulik tra, la, la.

Neuze oa klevet eur muzik,  
'Nenor d'ann azen Fistoulik.

Fistoulik tra, la, la, la,  
Fistoulik tra, la, la.

Ann azenet reud a vrame,  
Hag al louzet koz a flerie.

War Fistoulik tra, la, la,  
War Fistoulik tra, la.

Ann targichenn a viaoue,  
Ar c'hole taro a vleje

Da Fistoulik tra, la, la,  
Da Fistoulik tra, la.

Ar gomerezet a wele,  
Hag aen doganet a c'hoarze

Da Fistoulik tra, la, la,  
Da Fistoulik tra, la.

Fistoulik n'en doa doue ebet  
Ha gant ann diaoul eo bet samet,

Fistoulik tra, la, la, la,  
Fistoulik tra, la, la.

Fistoulik zo ead war he benn  
Gant Potr ar Ponthou d'ann ifern,

Fistoulik tra, la, la, la,  
Fistoulik tra, la, la.

Katel gollet , greg Lucifer,  
E deuz ho laket o'ch ar ber,

Fistoulik tra, la, la, la,  
Fistoulik tra, la, la.

ENN ifern ho daou m'aïnt brema  
Gant ann diaoulou koz o fleria.

Fistoulik tra, la, la, la,  
Fistoulik tra, la, la.

RA N' vo klevet enn Armorik  
Biken komz euz eur fistoulik.

Fistoulik tra, la, la, la,  
Fistoulik tra, la, la.

POTRET Breiz n'int bet biskoaz,  
Na fistoulik na mez ar groaz !...

« Ni zo bepret Bretonet ;  
» Bretonet , tud kalet. » (\*)

POTRET Breiz zo kristien,  
Na mez ar groaz ne vint biken !

« Ni zo bepret Bretonet ;  
» Bretonet , tud kalet. »

AR VRETONET a oar mervel,  
Evit ho feiz ha Breiz-Izel !...

« Ni zo bepret Bretonet ;  
» Bretonet , tud kalet. »

I.-P.-M. AR SKOUR.

Propriété de l'auteur.

(\*) BRIZEGUS.